

KANNADIG

JAMBOTARC'H

Kelaouenn Emglev An Tiegezhioù niv. 58 Du - Kerzu 2008 Priz : 2 €

Hudverzoù ar Sklavelezh

Hudverzoù¹ ar sklavelezh

Un deiz eus miz Mezheven 2008 ma klasken ur skingasadenn da sellout outi evit an abardaevezh e raen pezh a zo anvet *zapping* e galleg flour, ha war ar chadenn skinwel *Arte* e welis e kroge diouzhtu ur skingasadenn anvet « *Les Tabous de l'Esclavage* ». Ne oa ket se a glasken. Ur film a vefe aet gwelloc'h ganin er pardaez-se, met soñjal a ris e vefe mat enrollañ ar skingasadenn evit sellout outi en deiz goude pe un deiz bennak all, seul vui m'em boa lennet ur pennad e-barzh *Valeurs Actuelles* e miz Meurzh 2008, niv. 3721, talbennet *Esclaves en terre d'Islam, un tabou bien gardé qui a des allures de génocide*, gant Frédéric Valloire. En ur soñjal e vefe mat kaout daou savboent disheñvel evit ober va mennozh e lakais ur gasedig video em lunenroller² hag e pouezis war an douchenn enrollañ.

Ne voe nemet er miz da heul ma sellis ouzh ar skingasadenn-se ha ne voen ket kerseet da vezañ enrollet anezhi, hag en em c'houlennis zoken perak e oa bet skignet rak ne oa tamm ebet *politically correct*, evit chom hep lavarout e “torre ar varakenn” en amzerioù-mañ a geuziadezh³ kefridiel ha rediek, hogen untuek atav, evel-just.

Kregiñ a rae ar skingasadenn gant ur restadenn⁴ war Maoritania ma oa gouarnamant ar stad afrikat-se o paouez berzañ ar sklavelezh, goude bezañ he berzet div wech a-ziagent hep ma vije bet efedus ar berzidigezhioù-se, peogwir e kendalc'he bepred ar

sklavelezh er vro⁵. Displeget e oa er restadenn e oa bet pleustret ar sklavelezh-se a-holl viskoazh gant ar vrientiniezh arabiat-berberat diwar goust ar boblañs afrikat du. E kerzh ar restadenn e voe lavaret e voe paouezet mui pe vui gant ar sklavelezh-se pa oa bet ar vro un drevadenn c'hall, met pa voe ar vro en he frankiz adarre e voe adkroget.

Eil lodenn ar skingasadenn a oa ur film gant Antoine Vitkine a gomze eus holl zoareoù ar sklavelezh dre ar bed. Kregiñ a rae gant an degounadenn⁶ e voe embannet e 1930 gant ar gelaouenn c'hall “*Le Matin*” ur restadenn graet gant ar skrivagner Joseph Kessel en devoa enklasket war ar sklavelezh en Afrika. Kontañ a rae pezh en devoa gwelet : marc'hadoù sklaved e-lec'h ma veze gwerzhet morianed evel chatal, ha karavanennoù gant gwazed, maouezed ha bugale chadennet o vont etrezek Arabia saoudat ha Yemen ; Arabiz e oa ar warded. Kontañ a rae ivez pezh en devoa klevet digant tud aterset gantañ : ar Vorianed hemolc'het evel jiboez⁷ gant brezelourion verberat pe arabiat war o c'hañvaled, an tan lakaet en o c'hêriadennoù. Evit dont a-benn da breizhañ bev ur sklav morian, daou pe dri all a golle o buhez. Teoget e voe Europa gant danevelloù Joseph

¹ Hudverz : *tabou*.

² Lunenroller ; *magnétoscope*.

³ Keuziadezh : *repentance*.

⁴ Restadenn : *reportage*.

⁵ Malek Chebel, en e levr *L'Esclavage en terre d'Islam*, Fayard, a ziogel e vefe c'hoazh tri milion a sklaved er broioù islamat.

⁶ Degounadenn : *évocation, rappel*.

⁷ Pa oan o labourat er Sahara e derou ar bloavezhioù 60 e lavaras din un deiz ur blienier tourter a oa un den du, ganet e Wargla, e oa bet e dad skrapet pa oa bugel en ur gêriadenn eus ar Soudan (Mali bremañ) pe Nijer, lakaet en ur sac'h, staget war gein ur c'hañval ha degaset evel-se, war-hed 2000 km a-dreuz ar gouelec'h, betek Wargla.

Kessel, gant gwir abeg, met buan e voe ankounac'haet an dra-se.

Bep bloaz e vez aozet gant an UNESCO un devezh-bed eus ar sklavelezh, hogen gant prezegennoù an areizhourion⁸ ne vez morse anv eus ar morianetaerezh deskrivet gant Joseph Kessel e 1930. E gin-kaer e laka an Unesco holl nerzh he c'hendrec'hidigezh da vukañ hogos hepken war ar morianetaerezh etrezek Amerika, hag e weled, goude gweladenn Memorial ar sklavelezh en enezenn Gore e-tal Dakar (Senegal), kartennoù an UNESCO, o tiskouez holl hentoù-mor treuzatlantel ar vorianetaerion adalek aodoù kornog Afrika, skrivet druz evit gouverkañ o fouezusted, pa weled linennoù all dister gant poentigoù o vont war-du ar Maghreb, Egipt, Arabia, Yemen, a-dreuz ar Sahara. Bez' e lavare addispleger ar film e konter war-dro 11 milion a sklaved vorian kaset da Amerika, met ar re kaset war-zu ar broioù muslimat a zo tost da 17 milion⁹, met ne vez ket komzet diwar o fenn. Salah Trabelsi, istorour e Skolbenn¹⁰ Lyon, o kemer perzh en ur studivod¹¹ e Maroko, e vro, a lavaras e voe respontet dezhañ pa gomzas eus gwirvoudlezh ar sklavelezh er broioù islamat : “Perak komz eus sklavelezh er broioù islamat, damantet mat e veze ouzh ar sklaved er broioù-se”. Marteze e c'helle an dra-se bezañ gwir tamm pe damm, dreist-holl pa asante ar sklav dont da vezañ muslimat, met n'en deus biskoazh ar C'horan embannet ur gendaonidigezh eus ar sklavelezh. E gin-kaer, an *hadithoù*, ar *fiqh* (gwir muslimat), ar *charia* a gloka hag a resiz an diferadurioù-se, evel ma voe kadarnaet gant ar Maoritanean Abdel Ethmane Yessa er gaozeadenn a voe da heul, renet gant Daniel Leconte. Ar Senegalad Imbrahima Thioub a zisklerias zoken e oa bet harpet islamidigezh Afrika gant ar sklavelezh o vezañ ma ne c'helle ket ur muslimad bezañ, sañset, sklav ur muslimad all, pezh ne oa ket spletus avat evit kenderc'hel da bourchas trawalc'h a sklaved d'ar broioù islamat. Neuze e voe azasaet lezenn an Islam, da skouer gant un den illur evel Ibn Khaldoun (1332-1406), eme Mohamed Ennaji, kelenner er skolbenn Rabat, en ur gantverzout ar Vorianed evel un isgouenn, nesoc'h ouzh al loenelezh.

Gant treuzidigezh spontus ar Sahara, war droad ha chadennet etrezo, e varve endeo un darn bras a-walc'h eus ar sklaved, met ne oa ket echu c'hoazh

⁸ Areizhour : *orateur*.

⁹ Da ouzhpennañ ouzh ar sifr-se ar 4 milion a sklaved savet war Europa gant an Durked, hag hon eus ar sifr a 21 milion a dud bet gwazh eus ar sklavelezh e broioù an Islam, da lavarout eo an doubl eus an 11 milion eus ar morianetaerezh treuzatlantel.

¹⁰ Skolbenn : *Université*.

¹¹ Studivod : *colloque*.

kalvar ar paourkaezh morianed skrapet. Ret e oa dezho gouzañv c'hoazh oberatadenn ar spazhadur ur wech degouezhet war ar marc'hadoù en Egipt, Arabia, Irak, pe e lec'h all. Ha diwar ar spazhadur-se e varve etre 70 ha 80 % eus ar sklaved a ziozel Mohamed Ennaji, ha kement-mañ a zispleg priz uhel-kenañ ar spazhidi war ar marc'hadoù, a ouzhpenn Salah Trabelsi. An tu-se eus ar sklavelezh en douar islamat eo, a vez meret gant Tidiane N'Diaye en e levr *Le Génocide voilé*, Gallimard, o verkañ e vev hiziv diskennidi niverus eus ar sklaved er Brazil, er Stadoù Unanet, en Inizi Antilhez, pa vezont rouez er broioù islamat, dreist-holl ar re o deus bet o hendadoù ar c'hroc'hen du. Ur wech spazhet ne c'hellent ket ganaduriñ¹² ken evel-just. Evitañ ez eo ur gouennlazh, na mui na maes. Bez' ez eus Memorial ar sklavelezh en enez Gore war ar Meurvor Atlantel, a voe lavaret gant unan bennak, met ret e vo gortoz pell c'hoazh a-raok ma vo unan heñvel en enez Zanzibar, da skouer, war aod Reter Afrika. Un termen a zo bet lakaet d'ar sklavelezh gant ar Gristeniezh abaoe pell, pa vez o treistpadout c'hoazh gant an Islam.

E 2001 e voe dalc'het ur gendael war ar sklavelezh e Bamako (Mali), ma kemeras perzh enni Ibrahima Thioub eus Skolbenn Dakar. Klask a reas dibikouzañ daoulagad an dud war an div zremm-se eus ar morianetaerezh : pouezus war-du ar c'hornog, met ken pouezus all war-du ar reter, hag arabat disoñjal kiriegezh an Afrikiz-du o-unan er reuz-se. Selaouet e voe gant doujañs hep na vije den evit mont a-enep dezhañ, met goude ar gendael e teuas Afrikiz-du d'e welout evit lavarout dezhañ e oa gwir, pezh en devoa diskleriet, hogen arabat e oa lavarout an dra-se dirak an dud wenn ; d'o zro e teuas tud wenn d'e welout evit e drugarekaat da vezañ bet kalonek a-walc'h evit lavarout ar wirionez, hogen int, ne c'hellent ket lavarout an dra-se, rak kerkent e vefe tamallet outo bezañ gouennelourion.

War giriegezh Afrikiz-du o-unan en daou vorianetaerezh, ez eo Ibrahima Thioub an hini nemetañ, tost da vat, o vukañ e viz warni. Bez' e lavaras : « Ar sklaved ne gouezhent ket eus an neñv, ret eo bet a-walc'h o c'henderc'hañ. Ne oa Stad ebet gouest da gaout ar barrezhioù politikel, kalvezel, armerzhel, da zont war aodoù Afrika, da sankañ e-barzh ar c'hevandir, da zastum an dud en o c'hêriadennoù hag o c'has ganto evit o ezhporzhiañ¹³. Bez' ez eo dre maz eus bet tud eus ar

¹² Ganaduriñ : *procréer*.

¹³ Komz a ra evit an ezhporzhiadur dre vor, rak war bevennoù ar Sahel, Berbered hag Arabiz a rae o-unan an hemolc'h, evel hon eus gwelet uheloc'h.

vegenn afrikat hag o deus komprenet mat-tre ar splet a c'helljent tennañ eus ar gwezher¹⁴ diavaez-se a zegouezhe war aodoù Afrika¹⁵ ; servijet o deus da hanterourion evit preizhata ar sklaved, hag aozañ un armerzh askorus¹⁶ a-walc'h na save kudenn zivezel ebet diwarnañ d'ar c'houlz-se. Bez' ez eo evidomp-ni, Afrikiz, ma sav hiziv diwarno kudennoù divezel ».

Kadarnaet e vez komzoù Imbrahima Thioub gant tud all evel Henri Médard eus Skolbenn Paris I : « N'o deus ket an Afrikiz gortozet ma vije bet displeget dezho gant an Europiz pe an Arabiz petra oa ar sklavelezh evit ijinañ anezhi o-unan, anat eo ! Met chom a ra an aters kasaus : daoust hag ar wazhidi¹⁷ a c'hell bezañ ar re gablus war un dro ? Bez' e kaver gwelloc'h ur saviad eeun e-lec'h ez eus diouzh un tu an dud vat, ha diouzh un tu all an dud fall, met en devoudelezh¹⁸ ez eus tud vad ha kalz tud fall mesket, ha louet eo an darn vrasañ eus ar saviadoù ».

« E-pad kantvedoù o deus marc'hadourion ha pennoù-brezel afrikat preizhataet sklaved e diabarzh ar c'hevandir afrikat evit o gwerzhañ d'an Arabiz. Test eo hanvoudegezh¹⁹ an hanterourion-se eus ur werc'helezh²⁰ all, hudverzekoc'h²¹ c'hoazh, kuzhet en istor-se e gwenn ha du, ur sekred miret mat : pleustret e veze war ar morianetaerezh e kreiz ar c'hevredigezhioù afrikat o-unan. Kalz a-raok donedigezh an Europiz hag an Arabiz ha kalz goude o disparti, milionoù a Afrikiz a zo bet sklavekaet gant Afrikiz all, 14 milion hervez an istorour saoz, Patrick Manning ».

Ali Moussa-Lye, karget eus ar programm war ar sklavelezh gant UNESCO a lavar o deus an atebion aon rak digeriñ boest Pandora. An Arabiz a gav gwelloc'h ganto tabutal war trevadennerezh²² Europiz eget digeriñ breudvell ar sklavelezh ; ha peogwir e fell a-walc'h dezho kaout keuz, lezomp

¹⁴ Gwezher : *facteur*.

¹⁵ Pell emañ eus pezh a veze desket deomp er skol hanter-kant vloaz zo : morianetaerion naonedat o prenañ sklaved en eskemm gweraj ha bravigellerezh gant nemeur a dalvoudegezh. Ouzhpenn bezañ faos e oa kemer an Afrikiz evit paourkaezh tud aes da douellañ.

¹⁶ Askorus : *rentable*.

¹⁷ Ar wazhidi : *les victimes*.

¹⁸ Devoudelezh : *réalité dans les faits*.

¹⁹ Hanvoudegezh : *existence*.

²⁰ Gwerc'helezh : *ce qui existe effectivement*.

²¹ Hudverzek : a.g. *tabou*.

²² Unan eus an abegoù roet evit reizhabegañ an trevadennerezh a voe dres evit ober paouez ar sklavelezh, ha da gentañ-penn an hini a bleustre an Durked e diardro ar Mor Kreizdouarel ; er 16vet kantved, a skriv F. Valloire, e preizhe ar gourserion varbarek muioc'h a Gristenion en un argadenn war aodoù Sikilia, Balarez pe Valencia eget na oa Afrikiz harluet bep bloaz gant ar morianetaerezh treuzatlantel.

anezho henn ober. Gant tud ar vegenn afrikat, muslimiz kalz anezho, an devez²³ da vezañ kedgred gant an Arabiz a zo trec'h war retvez ul labour eñvorel. Ar merzhad hon eus, eme Tidiane N'Diaye, e vez degemeret mat-tre e vije deuet an drouk bras gant Europiz, met tamm ebet gant an amezeion muslimat eus an Norzh pe eus ar Reter. Hiziv ar broioù muslimat eus Norzhafrika pe eus ar Reter-Krenn a zo deuet mignon-tre gant broioù Afrika-du, neuze en em glev an holl dud vat-se war gein tud ar C'hornog, evit chom hep digeriñ en-dro pajennoù an istor poanuis-se.

Klozet e oa film Antoine Vitkine gant ar c'homzoù-mañ : « Er C'hornog ivez ez eo dianavezet istor gwirion ar morianetaerezh. Daoust ha ret eo gwelout en dianaoudegezh-se an aon da feukañ an hen bobloù trevadennet, pe en enep gwelout un doare dreistelezh eus an den gwenn a vefe an hini nemetañ kiriek eus e oberoù, an hini nemetañ ac'haezadus d'ar geuziadezh²⁴ ? Bez' e vefe neuze stumm uhelañ an dismeg e keñver pobloù a varnfed divarrek da vezañ bet graet torfedoù ».

Breizh hag ar Sklavelezh

Kensellet eo bet Breizh gant ar sklavelezh peogwir o deus porzhioù evel Naoned²⁵ hag an Orient kemeret perzh er c'henwerzh-se, anvet tric'hornek. Olivier Pétré-Grenouilleau, kelenner e Skolbenn Su-Breizh, en un niverenn arbennik eus *Bretagne Magazine* e 2004 a skrive en e bennad : *Les Mosneron, de Nantes, les débuts d'une famille négrière*, e terc'houeze morianetaerezh porzhioù Naoned, an Orient, hag en ur c'heñver bihanoc'h, Brest ha Gwened, 87 % eus an obererezh-se evit Frañs a-bezh en 18vet kantved ; setu perak ez eus bet graet, gant gwir abeg, ur plas bras d'ar morianetaerezh e Mirdi Naoned, staliet e-barzh Kastell Duged Breizh²⁶. Tezenn Istor O.P.G., difennet e 1994, a oa war ar

²³ Devez : *sentiment*.

²⁴ Ur geuziadezh broudet ha kalonekaet forzh penaos gant ar vedelourion e sell d'ober d'an Europiz asantiñ an enbroerezh afrikat evel un dic'haouadenn d'o fallagriezh e-keñver an Afrikiz gant ar sklavelezh.

²⁵ Deuet eo en-dro war va eñvor en ur skrivañ ar pennad-mañ pezh en doa lavaret deomp hor skolaer e 1949-50, a-zivout ar bombezadegoù gant an Amerikaned war Naoned a lazhas 1463 den e miz Gwengolo 1943 (67 soudard alaman hepken en o zouez) : Leviet e vije bet ar c'hirri-nij-se gant Amerikaned-du, o dije graet a-ratozh da leuskel o bombezennoù ne vern penaos evit kastizañ Naonediz da vezañ graet morianetaerezh gwechall-gozh ; diwirheñvel a-walc'h e hañval bezañ an dra-se, seul vui ma ne gredan ket e vije bet kalz re zu o levian kirri-nij amerikan e 1943. Gouezet em eus hepken, dre furchal en dielloù, e voe an dremmour Clark Gable, perzhiek er skouadrennig a reas bombezadeg an 23 a viz Gwengolo. Clark Gable an hini a c'hoarias Rhett Butler er film *Gone with the Wind*, hag a oa kentoc'h diouzh tu ar vistri sklaved.

Metoù morianetaer eus Kêr Naoned. E 2004, e ti Gallimard ez embanne ul levr, frouezh e imbourc'hioù : *Les Traités Négrières, Essai d'Histoire globale*. Trouz a reas e levr e metoù ar c'hevredigezhioù afrikat-du er C'hwec'hkogn, dreist-holl dre ma kave dezho e lakae an holl vorianetaerezh war an hevelep pazenn. Evito ne oant ket holl dellezek da vezañ studiet ha keñveriet ha gwelout a reer an dra-se mat-tre war lec'hiennoù ar genroued. Lakait anv O.P.G. en ur c'heflusker

²⁶ Daoust ma c'hellfe bezañ kavet gant Brezhoned zo, evel don, e tlefe Kastell hon Duged servijout da draoù all, rak eus Istor Breizh, ne vez ket kalz anv anezhañ e salioù ar mirdi-se.

imbourc'h hag ho pezo ac'haez d'un toullad pennadoù, blogoù, lec'hiennoù kendaelañ, hag e welot ez eus, evit an darn vrasañ eus an dud, ur morianetaerezh hepken a dalvez ar boan da gomz diwar e fenn : an hini treuzatlantel !

Evel-se emañ an traoù, setu perak em eus priziet ar skingasadenn-se war *Arte*, rak ar wech-mañ ne oa ket tud wenn hepken o komz, met Afrikiz-du evit an darn vrasañ ha tud a-bouez ouzhpenn. Ra vezent trugarekaet evit o c'halonegezh !

Donwal Gwenvenez

Ronan ar Glew

Aet eo Ronan ar Glew d'an Anaon d'ar Meurzh 7 a viz here 2008 en e rannidi e Brest, goude bezañ labouret evit ar brezhoneg betek kreiz an hañv daoust d'e yec'hed o fallaat. E-kerzh e obidoù en iliz karter ar skol-veur e Brest e voe lavaret e selle ac'hanon evel e vreur ; gwir eo, eo bet heñvel a-walc'h hon redbuhez ha kemmesket a-hed-ar-wezh en un doare souezhus.

Ganet eo bet d'ar 5 a viz here 1922 e Lokournan-Leon en un tiegezh a bemp a vugale ma voe eñ an hini diwezhañ, rak e vreur bihan ganet e 1924 ne chomas war an douar-mañ nemet div sizhunvezh, pa yeas ivez o mamm d'an Anaon d'he 27 vloaz ha Ronan 2 vloaz hepken dezhañ. Desavet e voe neuze ar vugale, div blac'h ha daou baotr, gant o zad ha gant ur voereb, e kêr Lokournan, hag ivez gant kerent all war ar maez e Plouzane. Un tiegezh deol e oa, en un endro sevenadurel kristen, tost ouzh an iliz-parrez : ar bedenn vras ha buhez ar Sent goude koan, an Oferenn bep Sul evel-just ; hag an daou baotr, Lukian ganet e 1920 ha Ronan, a voe abred e strollad ar gurusted. Ur gwir vicher e oa, hag ur gopr, evit an tiegezh : mont mintin abred en iliz gant unan eus ar veleien pe gant ar c'hloc'her-ograouer, da ganañ e latin, (ur rukun marteze evit ar paotrig met ur splet evitañ pelloc'h dre m'en em voazas ouzh ar yezh-se), ar Servijoù evit an Anaon, kuitaat ar skol a-greiz-holl evit an interamantoù, ambroug ar beleg da nouenniñ pe da gas ar Sakramant (meulet ra vezo !) d'ar re glañv. Dalc'het en doa soñj, bloavezhioù war-lerc'h, e oa deuet en hañv 1933 da zegas ar Sakramant d'am mamm, hag e 1936 da obidoù va zad.

Abred e voe lakaet e skol kentañ derez ar Frered, e krec'h kêr Lokournan, ur savadur bras a-us da Blas' ar C'hezeg. Eno en em gave paotred eus kêr ha paotred a zivar parrezioù all ar c'hanton a

gendalc'he evel-just da gomz brezhoneg war ar porzh-c'hoari. Ar re gentañ a oa soubet endeo hanter er galleg, hanter er brezhoneg ; d'an eil re e veze desket galleg dre an "hentenn a soubidigezh" sellet neuze gant ar Stad C'hall evel efedus da zeskiñ galleg ha da ober Gallaoued na petra 'ta ! ; ha kastizet e veze ar re a veze tapet, gant ur c'henskoliad, o komz brezhoneg, ar pezh a zo bet c'hoarvezet ganin, hag em boa bet "ar vuoc'h" a oa ur pezh moneiz toull dalc'het war-bouez ul las ler en-dro d'am gouzoug. Perak "ar vuoc'h" ? Marteze e oa bet penn ur vuoc'h war ar pezhioù moneiz gwechall pa veze ar buoc'hed moneiz eskemm er broioù keltiek hag e broioù all ? E fin an devezh e ranke an hini a oa ar vuoc'h gantañ lavarout gant piv e oa bet tapet, hag evel-se betek an hini kentañ bet tapet da gentañ gant an evezhier, un den hegarat ouzhimp a-hent-all, hag a veze daoust da se lesanvet "butun". Ha padal, an dra-se ne vire ket ouzh hor mistri-skol a lakaat ac'hanomp da studiañ *Géographie du Finistère, hag Histoire de Bretagne* (Du Cleuzioù a gav din). Frouezh ar c'hentelioù a vez un tammig diouzh an dornlevrioù kinniget, met muioc'h c'hoazh diouzh gred hag ampartiz ar c'helenner ha kalz muioc'h diouzh karantez ar skolidi evit an danvez kinniget dezho. Ur c'helenner gredus hor boa , an Aotrou Betrom, hon lakae da ganañ ivez "Gwir Vretoned" e brezhoneg, ha "Kousk Breizh-Izel" en destenn c'hallek a oa kalz broadelouroc'h c'hoazh eget an hini vrezhonek, da vihanañ evit ar skolidi na c'hortozent nemet se. Nebeut anezho siwazh, rak ne anavezan, diwar ar c'hantadoù o deus klevet kement-se e-kerzh meur a vloavezh-skol, nemet daou baotrig, Ronan ha me, a zo bet dedennet gant an Emsav. Kevrin ar c'halvidigezh ! Un den all a oa bet en hon raok, an

Doktor Dujardin (1885-1969) a skrivas kalz ha pergen Buhez ul Lokournanad all, Ar Gonideg (1775-1838) geriadurour, ha yezhadurour brudet-tre, met ivez troer ar Bibl ha pedennoù en hor yezh (gant ar soñj mont da veleg ez eas er c'hloerdi met en abeg d'an dispac'h gall e teuas en-dro da guzhat nepell diouzh Lokournan e koad Kerveatouz, a yaemp-ni da c'hoari brezel bihan ennañ). Piv a c'hellfe gouzout e pelec'h e tarzho an dour a red dindan-zouar, hag ar Spered a c'hwezh e-lec'h ma kar ? Er bloaz-mañ hepken eo bet digoret, nepell diouzh an ti ma oa bet ganet Ronan, skol Diwan Lokournan, ar penn kanton diwezhañ en departamant ouzh henn ober !

Ar **santifikat**, (pebezh anvad relijiel, petra bennak ma ne oa nemet distummadur ar galleg *certificat* !), evit an testeni dibenn studi gall a verke fin ar studioù "klasek" evit al lodenn vrasañ ac'hanomp hag a grogfe da labourat d'o zriek pe bevarzek vloaz pe war ar maez pe e stal un artizan bennak, gov, kalvez, munuzer, boureller, botaouer, toer, mañsoner, baraer, mekaniker, kere, kemener, piker-mein. Bugale ar vourc'hizion, nevez-vourc'hizion peurvuiañ (e Lokournan e oa daou noter, un urcher, tri medisin, ha me oar-me), met o bugale o doa kroget gant o studioù en ul lise e Brest en unnekvet klas^{27[1]} hag e kendalc'hent betek ar vachelouriezh goude bezañ bet graet o "*humanités*" klasekoc'h c'hoazh, doare nemetañ moarvat da vezañ "den" (ne ouient ket, met piv a verz, e teu "*humanité*" eus "*humus*", a dalvez "douar", hag ez eo "*humanitas*" ar perzh "bezañ douarel"). Soñjet pep hini pezh a garo, met diouzh ar pezh a garer e vezer, ha dre forzh bezañ ez eur. Amen ! i-e : evel-se emañ, d'am meno.

Nemet e dibenn ar bloavezh-skol e teue leaned a bep seurt (marteze e veze re a gloareged endeo en eskopti) da ober ur brezegenn gant bannskeudennoù er c'hlas-"termen" !, klas ar santifikat, da welet gant ar mestr-skol ha gant kureed ar barrez pere eus ar baotred-se daouzek vloaz dezho, o doa ar perzhioù mat evit mont marteze da veleg, da visioner pe da frer. Hag e-tro ar bloaz 1934 e voe kavet mat Ronan da vont da skolaj an Asompisionisted e Saint-Maur e-tal Angers, seul vuioç'h m'edo dija e vreur eno abaoe daou vloaz (daou vloaz war-lerc'h ez aen gant an Tadoù Gwenn er Rouergue). Kenderc'hel a reas er bloaz 1937 da brientiñ ar vachelouriezh e Bergerac (Perigord). Gounit a reas arnodenn-dre-skrid kentañ lodenn ar vachelouriezh e miz Mezheven 1940. Un dra all avat a c'hounezas e-kerzh ar bloavezhioù-se, hag a servijas dezhañ e dazond

dianav e vuhez : lakaet e voe da zeskiñ ervat yezhadur ha geriadur gallek, alamanek, kastilhanek ha rusianek e sell da vezañ misioner e Suamerika pe e Rusia, ha ... brezhonek daoust ma ne oa ket er programm pell ac'hann, met kontet en deus din en doa diskoachet ur geriadur Ernault ha bemdez e tiroge ur follenn hag e teske dre guzh an div bajennad dindan eñvor a-raok he zeurel kuit en ul lec'h na vefe ket kavet.

Er miz Mezheven-se 1940 edo an Alamaned o paouez gounit ar brezel war ar C'hallaoued, ha Bergerac en em gavas disrannet diouzh ar broioù dalc'het ganto. Setu ne c'hellas ket mont di en-dro evit kenderc'hel gant e studi eil derez. Ouzhpenn-se, trivec'h vloaz edo, oad arvarus e mare ar brezel-se, ha furoc'h e kavas chom da sikour e dad ha mont war ar maez da labourat ha... da guzhat. Kement-se am eus gouezet mui pe vui kalz diwezhatoc'h adalek ar mare m'am eus darempredet anezhañ evel brezhoneger hag emsaver er bloaz 1947, rak chomet e oan-me war ar studi e rannbarzh dieub Bro-C'hall, e Norzhafrika hag en arme da heul dilestradeg an Amerikaned eno e miz du 1942. C'hoarvezout a reas dimp en em adkavout e kloerdi bras Kemper e-lec'h m'en em gaven, – da welout –, goude bloavezhioù un tonkadur damheñvel ouzh e hini.

E Lokournan ivez, met en ur c'harter all, e oan deuet er bed, e 1924, daou vloaz war e lerc'h, er bloaz ma varvas e vreur bihan, hag e vamm. Hogen n'en em anavezemp ket nemeur, dre ma oa eñ daou vloaz warnon, ar pezh a zo kalzik en oadoù-se, ha dre ma vevemp e karterioù arall. Dav eo gouzout e oa Lokournan, abaoe ar grennamzer, ur gêr, ur penngarter evit melestrourion hag archerion an duded gallegerion, hag ar rouaned c'hall war o lerc'h. Ur gêr a notered, a genwerzhourion brasik ha bihan hag a artizaned, hep kouer ebet pe dost. Ne oa ket a vaezioù : digant parrez plouezel Plouzane e oa bet ret prenañ un dachenn-zouar evit sevel an iliz-parrez nevez en 18vet kantved. Ur greizenn hag ur marc'hallac'h e oa ar penn kanton evit kouerion ar parrezioù a dro-war-dro a veze aloubet straedoù, plasennoù, stalioù, ostalerioù, marchosioù ganto, o eostoù hag o loened, bep sadorn ha dreist-holl e foar ar miz, ken ne oa anv ebet d'ar plasennoù nemet diouzh ar pezh a veze gwerzhet warno : plas ar moc'h nepell diouzh an iliz kozh e-tal Penn ar Pont, plas an ed, plas ar c'haol war hent an Aber-Ildud, plas an ti-kêr, m'eo c'hoarvezet ganin gwerzhañ lapined, a-us d'ar c'hoc'hu ma veze kavet vioù, amann ha palevarzhioù kig moc'h, plasenn Penn ar Ru ma veze savet tinelloù ar varc'hadourien dilhad ha

²⁷ Ar CP hiziv an deiz.

listriaj, plas ar saout en ur bignat pelloc'h eget an iliz parrez, disparti diouzh plas al lioù (leueoù) gant hent Konk, hag e lec'h uhelañ ar gêr plas ar c'hezeg. Pa ne veze na marc'had na foar e servije ar plasennoù da vugale pep karter, hep darempred koulz lavaret etrezo. Kartier Ronan a oa etre an iliz parrez hag ar presbital, va hini e Plasenn Penn ar Ru. Adalek an oad a 12 vloaz avat e c'hellemp en em gavout etre skolidi evit troiadennoù war varc'h-houarn, betek Ar Folgoad, pe oc'h ober war-dro bugale ar patronaj, pa ne vezen ket kaset-me evit er foenn, pe an eost e ti un eontr. A-hed ar bloavezh skol avat, ne zeue d'ar gêr ar re a oa e skolajoù leaned, evel don ha Ronan, nemet en hañv. Setu ma oa skort hon darempredoù skolidi ha skolajidi, betek ma voen sachet gant kloareged Lokournan da geñver hor pec'hirinad er Folgoad, er bloaz 1946, da vont da ober un taol esae e kloerdi bras Kemper.

E kloerdi bras Kemper e veze strollet ar gloareged, 250 pe 300 anezho, dre live studi hervez an niver a vloavezhioù a chome dezho da studial kent bezañ beleget. Met d'ar Yaou goude merenn e-ser mont da vale, ha da ziskuizañ en ur c'hoad, en em dolpent a vodadoù bihan hervez o c'horn-bro orin, hag evel-se en em gavis gant kloareged goueled Leon, Ronan en o zouez. Un dra all kalz pouezusoc'h am stagas outañ : dija e kentelioù brezhoneg an Ao. Pêr-Yann Nedeleg evit an holl, e tesken bep sizhun yezhadur ur yezh a oa bev em divskouarn dre va c'herent, buhez ar Sent, kantikoù en iliz hag er prosesionoù, traoù n'o doa ket servijet din betek-henn da venveg preder war ul live m'en devoa servijet ar galleg. Ronan ha daou pe dri all a ziskouezas din e oa ul lennegezh, un istor hag ur brederouriezh e brezhoneg. Gantañ em eus dizoloet Gwalarn, Istor ar Bed, Maodez Glanndour, Vallée, Mordiern, Roparz Hemon, "tud a rae traoù" evel ma lavare.

Siwazh ! Klañv bras e kouezhas, hag e rankas mont en-dro da Lokournan. Distroet di ivez er bloaz war-lerc'h e voe va zro d'e sachañ e-barzh an Emsav « da ober traoù ». Eus va frantad-ensellout-galvedigezh e Kemper e oa chomet din, ouzhpenn kresk ur stummadur kristen speredel ha poellek, ur c'halvedigezh a emsaver e brezhoneg. Bez' e oan bet en hañv 1947 e Rosko en ur staj kloareged kaset en-dro gant ar Breur Visant Seite, ar Chaloni Falc'hun, an Ao. Batany, h.a. Koumanantet em boa da KROAZ BREIZ er c'hloerdi, hag ivez da KAIEROU KRISTEN, SKED hag AL LIAMM. Er gelaouenn-mañ em boa lennet e 1948 un embann evit ur vicher gwerzher levrioù e B.A.L.B. "Breuriezh Al Levrioù Brezhonek" renet gant Langleiz ha Kervella-Kernuz. Kroget em boa en va-

unan, war varc'h-houarn, ur malizennad levrioù war an dibr, o vont a diegezh da diegezh e goueled Leon. E Lokournan e kendalc'hen da welout Ronan, ha soñj a zeu din eus ar baleadennoù a raemp etre Toull an A(v)on ha Pont Avenek war ar wenodenn a oa bet un hent-houarn, rak ur baleer touet e oa hag eo bet betek e vloaz diwezhañ. Unan eus e frazennoù a zo chomet em freder : « *Ne c'hellez ket kemm ar re all, met te da-unan* », levezonet moarvat gant e lennadurioù gresianek ha latinek klasek. Anat e oa en e gomzoù e plije dezhañ kement a oa klasek, ha diwezhatoc'h e raio gant ar ger « classique » e talbenn e c'heriadur bras. Unan all a oa : « *N'omp ket menec'h* », dre ma komzen moarvat diwar-benn an obererezh hag an arvesterezh er relijion.

Neuze eo e tivizas dont ganin e BALB, a oa ur gevredigezh kenwerzhel (ha politikel, dave arouezennel da emsavadeg Sebastian ar Balp !, ha mennozh talvoudegezh ar yezh skrivet (s/o pennadoù war Al Liamm pe Imbourc'h). Da gentañ ez aemp a-gevret, en ur gampiñ dindan un deltenn. met buan e plijas dezhañ al labour-se evit daou abeg all a gav din : o vont a diegezh da diegezh dre ar maezioù e c'helle sevel fichenoù gerioù ha frazennoù, hag e yec'hed en em gave gwel diwar ur vuhez en e frankiz ha dindan an amzer. Ledanaat a reas e dachenn en ur feurmiñ ur gambr e Landerneve evit mont larkoc'h eget goueled Leon. En un doare e kemeras un tammig frankiz ivez e-keñver an aozadur-kreiz e Roazhon a bourchase dimp ar pakadoù levrioù da werzhañ : kavet en doa e ti ur mouller ur bern levrioù dilezet, a brenas marc'had-mat hag a werzhe mat a-walc'h d'an dud diwar ar maez a ouie c'hoazh lenn brezhoneg dre m'o doa desket ober e Buhez ar Sent, er c'hatekiz hag er c'hantikoù, ar merc'hed dreist-holl. Berzh a reas da skouer gant Buhez Genovefa a Vraban, Glaoda ar Prad. Setu perak moarvat e padas gant ar vicher-se pelloc'h egedon pa oa diaesoc'h dedennañ an dud gant Lizher an Hini Marv, ar Pesk Aour, Skridoù Breizh, Enez ar Rod ha traoù o dije goulennet un deskadurezh eil derez digant al lennerien. Ur skoilh all a oa war va hent-me : gwelet fall edon gant tud kêr Lokournan ha gant va familh a dorre din va fenn gant o "*An dra-se n'eo ket ur Zituasion, te hag a oa danvez-ajiser e fin ar brezet*". Plegañ a ris, dilezel a ris an obererezh pouezus-se, en ur genderc'hel, evel an holl en Emsav, da lenn ar c'helaouennoù ha da gemer perzh e KEAV hag e UNVANIEZH SPEREDEL BREIZH. En em gavout a ris e Roazhon e-lec'h ma kendalc'his da ober gweladenn da F. Kervella-Kernuz a groge, eñ an hini kentañ, da ijinañ ar "c'hazetennoù evit netra". Ronan a gendalc'has war va lerc'h koulz ha

daou zen yaouank all, Y-V. Bouëssel du Bourg hag unan all eus Gwipavaz hag en doa ur c'harr-tan. Buan avat e soñjas ivez Ronan ne oa ket ur "Zituasion" nag evitañ nag evit ar brezhoneg. Dre an Emsav e ouezas e klaske ar gontez a Rohan-Chabot, he doa ur c'hastell er Feunteun Vat e Entraven, kelennerion evit he c'hwec'h a vugale ha kelennerion a vefe brezhonegerion, rak ar brezhoneg a oa yezh an ti. Ur bloavezh bennak e chomas eno. En un ti all en Normandi e kavas fred ha dreist-holl splot evit kenderc'hel gant e studioù ha tapout a-benn er fin ar Vachelouriezh er bloaz 1953 d'an oad a vloaz ha tregont, gant ar meneg mat, rak ur studier aketus eo bet atav. E-kerzh an ehan-skol e teuas d'hor gwelout va gwreg ha me er Perigord e-lec'h m'am boa dibabet gounit bara va ziegezh dre ma n'em boa kavet lec'h all ebet e Breizh diouzh va micher ha dre ma veze eno kalz Bretoned divroet ha zoken Pêr Denez a oa kelenner e Perigueux. Bez' e oa ivez ar Chaloni Mevelleg aluzener an divroidi. Ouzhpenn-se e oan pitilh gant ar ragistor am boa desket e brezhoneg dre levrioù Istor ar Bed Meven Mordiern embannet gant Gwalarn hag am boa amprestet digant Ronan dres, hag er mare-se e oa *Les Eizjes* "kêrbenn ar ragistor". Eñ ne oa ket dre vignoniezh ouzh den Kro-Magnon e teue, met evit marvailhat gant ur c'hamalad a-gozh hag er yezh a vanke dezhañ moarvat en harlu. Mont a rejomp evelkent da gampiñ dindan an deltenn hag o keginan war un oaled trimaenek evel ma raemp hon daou en amzer BALB, evel m'edo ar c'hiz c'hoazh a-raok ma vefed rediet da vont war dachennoù-kampiñ, hag e-giz ma rae tud ar vro 20 000 vloaz araozomp met en un endro yenc'h, sur-mat. Ar c'houn eus ar skorn meur diwezhañ hon lakaas ar wech-se da dec'hout etrezek traezennoù tommoc'h Akwitania. Ha gant amzer vrav an hañv-se ez asantas prenañ diganin va *skooter* evit distreiñ d'an Normandi. Dont a reas ur wech all e-keit m'edo e skol-veur Rouen o prientiñ an aotreegezh. En taol-mañ, er bloaz 1965 moarvat eo en va bag ha war vor betek Royan e tremenjomp e sizhunvezh ehan-skol, met ne oa ket dedennetoc'h gant ar bageal hag ar goueliañ eget ne oa bet gant ar ragistor, hag e brezhoneg pa ve bet. Gwelout a ran anezhañ astennet war ar pont o lenn istor ha prederouriezh Hellaziz an amzer gozh, p'edon me o klask tennañ ar gwellañ implij eus an avel evit mont war-raok d'an donvor. Dispartiet e voemp en abeg d'ur gorventenn hon redias da baouez gant hon merdeadenn a-gevret ; hag e rankas mont en-dro da echuiñ e studioù klasek gresianek, latin, gallek. Berzh a reas evel-just : e korf daou vloavezh hepken, 1955, 1956, e tapas an aotreegezh hag ar *C'hapes* gant notennoù mat ivez.

Nadoz an tonkadur war dremm horolaj an amzer a verkas evidomp 1957 : dimeziñ a reas ha dibab a c'hellas nesaat da Vreizh en ur zont da vezañ kelenner e Granville e-lec'h ma chomo nav bloavezh-pad ; me a voe galvet d'ar brezel en Aldjeria hag a-raok mont di e prenis dastumad peuzklok GWALARN digant ur c'helenner skol-veur e Roazhon, peadra da genderc'hel da adkavout Breizh en ur vro na oa ket gall tamm ebet hag em boa anavezet e-pad pevar bloavezh e-kerzh ur brezel all.

Er bloaz 1963 e rois va dilez eus al lu gall evit emouestañ e S.A.D.E.D. "Strollad an Deskadurezh Eil Derezh", nevez savet, ma tegasis ennañ doareoù melestrerezh ha kelenneriezh-dre-lizher an hini edon o paouez kuitaat, peogwir em boa ragaozet va disparti dre ur bloavezhiad kentelioù dre lizher a-live gant ar vachelouriezh, oc'h adsplujañ e-giz Ronan en hon studioù liseidi. Gant skipailh SADED e voe lakaet e brezhoneg ar paperoù mererezh, ar c'hentelioù ha levrioù o tennañ d'an danvezioù na oant ket gall (kimiezh, fizik, h.a.), ha savet ar c'hentelioù o tennañ da Istor ha lennegezh Breizh. Kenlabourat a ris war ar c'hentelioù douaroniezh ha lennegezh er bloavezhioù 63-64, met soñjal a ris diouzhtu e Ronan ar Glew evit al lennegezh dre ma oa den a vicher ha dre m'en doa lennet kalz muioc'h a levrioù brezhonek egedon, en ur brientiñ seulabred ar pezh a vefe e wir labour a yezhadurour geriadurour. Kemer a reas va lec'h e 1965-66 seul aesoc'h m'en doa en em staliet e Brest gant e diegezh, evel kelenner e skolaj Penn-ar-C'hleuz. Setu m'hor boe tro d'en em welout en-dro. Ouzhpenn ur skol gant ur mererezh, kelennerien ha skolidi, e oa SADED ivez unan eus aozadurioù an Emsav brezhonek evel Skol OBER bet savet e 1932, ha dreist-holl KEAV savet e 1948 gant Langleiz, Vefa de Bellaing ha Ronan Huon, a labourer ennañ hogos bep bloaz abaoe an deroù. KEAV a roas bod da gelennerien ha skolidi SADED ha setu penaos e krogas Ronan da zont di ivez gant e wreg hag o bugale. Kendalc'het em eus me da vont da gKEAV kalz pelloc'h betek dilez an diazezerion. Marteze e oa re daer doareoù SADED e KEAV, hag o treiñ da re un emsav politikel emanvet EMSAV. Evit abegoù yec'hed e rois va dilez diouzh SADED e 1967, met Ronan a gendalc'has da gaout darempredoù gant tud EMSAV peogwir e varilhas kalz eus gerioù arnevez o c'helaouenn en e *Dictionnaire Classique Français Breton*, 4.000 pajennad e 10 levrenn embannet gant AL LIAMM etre 1983 ha 1994. Diskouezet en deus din an armeliad a fichenoù a zeue da vezañ an notennoù a save abaoe amzer ar skolaj moarvat diwar lenn (hag ivez diwar glevout hag a zo

daveennet LOKOURNAN er geriadur) pergen ar re a welen anezhañ o skrivañ en amzer BALB. E holl amzer a gase neuze oc'h ober skol e skolaj Penn-ar-C'hleuz, hag o kutuilh skouerioù gerioù ha lavarennoù er c'hantadoù a levrioù ha kelaouennoù meneget en e C'heriadur. Lavaret en doa din ur wech e heulie a-dost, en ur ober al labour-se, Geriadur hollanavezet Frañsez Vallée, ul levr a zo dalc'hmat dirak va zaol-skrivañ a-stok ouzh e zek re ha geriadur hollvrezhonek AN HERE en deus ivez kenlabouret d'e sevel e 1995 hag e 2001.

Perzh a gemere ivez en Oferenn-Sul a veze lidet e brezhoneg dindan iliz sant Marzhin, ha diwezhatoc'h e chapel sant Paol e-lec'h m'am boa tro da vont pa c'hoarveze ganin mont da welout kerent pe mignoned e bro va c'havell. Met e Bro-Roazhon edon staliet abaoe 1966, ar bloaz ma 'n em stalie-eñ e Brest. Hag e-giz ma kemere perzh ur wech ar miz en Oferenn-Sul e kev iliz parrez sant Marzhin e raen-me bep Sul e chapel lise sant Marzhin e Roazhon, (ouzhpenn-se e veze e Roazhon emvodoù, baleadennoù, pezhioù-c'hoari gant kerent ha bugale niverus e framm EMGLEV AN TIEGEZHIOU krouet er bloavezhioù 50 gant Kerlann hag Alan al Louarn). Kelenner galleg ha brezhoneg edo e skolaj Penn-ar-C'hleuz, kelenner brezhonek edon e liseoù sant Marzhin ha sant Visant e Roazhon. Ar stourmerion yaouank o doa kuitaet SADED hag EMSAV o doa goulennet ouzhin e 1970 kenderc'hel gant hevelep labour e SKOL AN EMSAV hag ouzhpenn-se mont da reiñ kentelioù-noz amañ hag ahont ha betek Laval, e

kelc'h Erispoe war blasenn sant Tugdual. Eñ ivez a yae da reiñ kentelioù e kreizenn DIWAN Treglonou, hag e skoulmas darempredoù a-dost gant STROLLAD AR VRO-BAGAN en ur c'hornbro hor boa anavezet hon daou, ouzhpenn hanterkant vloaz a-ziagent, e Breuriezh al Levrioù Brezhonek.

Dre ma kreske an Emsav e pellae ivez tachennoù labour an emsaverion. A-viskoazh, ha pergen abaoe kloerdi Kemper e oan chomet stag atav ouzh beleion an Emsav ha dreist-holl ouzh re Bro-Dreger : en o zouez Maodez Glandour dre e retredoù, hag AR BEDENN EVIT AR VRO, an Aotrou Klerg dre e destennoù evit an Oferenn hag ar Sakramantoù, hag e zornskridoù evit Liderezh an Eurioù a voe fiziet ennon a-benn ar fin, ul labour ken hir war ar mennozhioù hag hini Ronan war ar gerioù, en hevelep mare eus hor buhez.

Bloaz 'zo e oan bet o welout anezhañ en e ranndi. Poan en deveze dija da vale, ha bec'h alies da denañ e anal. Met kenderc'hel a rae da labourat : echuet en doa dornskrid ar geriadur Brezhoneg-Galleg a zlee klokaat al labour sevenet sioul ha pennek, fichenn-ha-fichenn a-hed e vuhez, war ar brezhoneg skrivet ha komzet gant kantadoù a skrivagnerion adalek an 18-vet kantved betek hiziv. Hag an deiz-se e tiskouezas din levrioù e rusianeg, ur yezh edo o klask peurzieskiñ, hag eñ en e c'hwec'hvet bloaz ha pevar-ugent, hag en doa kroget da studial en e yaouankiz flamm.

Paol Kalvez

Prederiadennoù diwar lenn

Avel Gornôg, Yann Bijer, Al Liamm, 2007. Priz Langleiz, Priz Trepos.

Evel ma vez displeget war kein golo al levr, pal ar skrivagner a zo bet daslivañ ar fealañ ar gwellañ ar bed bigouter en deus anavezet en e vugaleaj. Tech pennañ an holl labourioù a-seurt-se a zo moarvat ar c'holl meur en tremen eus ar gomz d'ar skrid, dreist-holl e degouezh arbennik ar brezhoneg; n'eo ket ken "dreistordinal" an degouezh-se koulskoude, rak "ar skritur a zo un taol-degouezh hepmuiken e istor mab-den", evel ma lavarfe ma zad. Un taol-degouezh dichañsus ha dañjerus a-walc'h, zoken : soñjit en holl degouezhioù a dud-n'ouzont-na-lenn-na-skriv lazhadeget gant tud-a-oar-lenn-ha-skriv ; n'eo ket evit netra e lavar an Aviel "Ar spered a ro buhez, al lizherenn avat a lazh...". Ar romanterez Ruth Rendell, en he levr anavezet *A Judgement In*

Stone, (bet troet e galleg dindan an anv *L'Analphabète*, ha graet ivez ur film anezhañ a zo tremenet meur a wech war TF1) he deus ijinet an degouezh kontrol : ur vaouez-na-oar-na-lenn-na-skriv a lazh izili ur familhad tud lennek. Orinel eo an istor, diskwer ha digredus e chom avat.

Evit distreiñ da levr Yann Bijer, daoust da harzoù-natur an testeni skrivet, ne c'heller ket nac'h ez eo bev-mat ar brezhoneg o teverañ eus pajennoù al levr. Mar lezomp a-gostez an nebeudig dister-dister a droiennoù rannyezhel-rik ("bigoutennek"-rik, en degouezh-mañ), evel "*a-benn*" o talvezout "*evit*", "*e-barzh*" o talvezout "*a-raok*", pe "*kas*" o talvezout "*klask*", na zedennint nemet feticherien ar folklor, an darn vrasañ eus ar peurrest a zo gwir bater evit an nevez-vrezhonegerion : troiennoù re nebeut anavezet, kevatalennoù "lennegel" da droiennoù

eeun, araogennoù resis-dreist ("bev-buhezek", ma kredan lavarout). Un tamm renabl eus kement-se-holl em eus graet izeloc'hik.

Pa vez Y. B. o tibunañ penaos ez ae en-dro ar bed bigoutennek-se hag an holl anvioù roet da oberoù hag izili ar bed-se, ez eo ez-sklaer un test hollfeal a daol evezh-bras da dremen hep falsaat an daolenn gant an disterañ distresadenn bersonel. Met pa'n devez ezhomm da ober anv eus ar pezh a dremene e penn ar vigouterion, ("an doare ma welent ar bed", evel a lavarfed hiziv), e chom ken boud ha ni, stourmerion arnevez ha gallekaet. Al lodennoù eus ar skrid a bled gant ar poent-se ne glotont ket mat gant peurrest al levr ; arverañ a reont ar yezh arnevez ("komunour", "faskour"), pennadoù istor-war-ar-prim ez int, ha zoken lagad al lenner nebeut-brezhoneger a wel n'eo ket Bro-Vigoudenn eo a zo o kaozeal aze, ar skinwel pe ar gelaouenn arnevez ne lavaran ket. ...

Ar wazed e Bro-Vigoudenn a vourre kenañ o varvailhat diwar-benn politikerezh pa ne vezent ket o labourat, a lavar an dezreveller deomp en un tu bennak. A-fed politikerezh koulskoude ne gaver e testeni al levr netra a c'hallfe degas spi d'ar vroadelourion vrezhon a hiziv : an holl dudennoù diskouezet a zo dija holle'hallekaet o spered, daoust d'o yezh brezhon c'hoazh. Ne venegin nemet ur skouer amañ, an hini helavarañ : un ozhac'h bigouter a zo o tezevellañ d'e gamaladed penaos e oa deut a-benn ar jeneral republikan Hoche da virout ouzh noblañsoù roueour a zilestrañ e Kiberen, hag e lavar diwar-benn kement-se eo bet "*saveteet Kiberen gant Hoche ...*"

War he c'hoar ez a an darn vrasañ eus al levr ; ne santer ket an amzer o tremen, pe neuze e santer anezhañ o tremen gorrek-tre. Lod a vo enoet-marv gant seurt lusk moarvat ; plijus em eus kavet anezhañ avat, gant an amzer evel un aezhenn dener o tremen dousik. Pa dosta dibenn al levr, koulskoude, e weler en deus graet Y.B. e soñj ouzhpennañ un tamm *action* arnevez, ha reiñ un tammig tizh d'an amzer. Dav dezhi : Naig a fell dezhi eurediñ gant he c'henderv Youenn, ar re vras a zo a-enep peogwir int kendirvi-kompez an eil d'eben, Naig a zo feuket-bras, enebñ a ra, amourouziñ a ra e kuzh gant Youenn, gwelet ha flatret e vezont, ha "*flap ha flap gant kaoz ar maouezed, gwashoc'h eget ur parkad brini ...*"

Renablig Troiennoù kavet en "AVEL GORNÔG"

**ha re nebeut anavezet gant an nevez-
vrezhonegerion**

1.Araogennoù. Morse ne rankfed disoñjal evezhiadenn Vallée : "araogennoù gallek : ur reizhad diglok ha dizefedus, nebeut arveret gant ar bobl. Araogennoù vrezhonek : ur reizhad pinvidik ha klok-tre, arveret start gant ar bobl."

Kaset e vezomp **war** sikour, krog e pep **a** skouarn eus ar baner, lakaat an toaz **e** go, joa d'an tri bugel **diwar** o soñj, e kredas **d'**ar plac'hig goulenn, an tad-kozh a zebre **war-bouez** beg e gontell, ar gwinizh hag an ed ledet **a** wiskadoù tev war ar plañchod, **e-harz** kel ar moc'h e chome Per ha Naig, ar vuoc'h a heulie anezho **war-bouez** ur gordenn verr, e tigure **war** ar yer (=e tigure an nor d'ar yer), ar rod bras kaset en-dro **war-bouez** nerzh an dour, o sellout **diwar** laez ar pont, laset e veze pep duilh **diwar** e goust e-unan, ma tiruilhfe ar glav **diwar** lein ar bern, penn-kezeg o sachañ **ouzh** ar bannoù, a daolas ar mestr **diwar** e souezh, ouzhpenn peder lur a bouez **enni**, dijuniñ **diwar** kafe du, **war** ma fevarzeg emañ o vont, roget e oa bet he c'houch **war-hed** pevar-ugent metr.

2. Geriaoueg. N'em eus ket lakaet amañ ar c'heriaoueg stag d'al labour-douar ha d'ar pesketaerezh a-gozh, peogwir n'o do mui kalz tro an nevez-vrezhonegerion da ober ganto d'am soñj (a-hend-all ez eo pinvidik-kenañ *Avel Gornôg* war ar poent-se, na petra). **Fustañ** : "foncer" (gwelloc'h eget "skarzhañ" d'am soñj). **Laou pafaleg** : "morpions". **Poullou** an daoulagad. **Joentrou** e ilin. **War-goll** gant ar re all : "en retard sur les autres". **Ha ma lagad pelloc'h, ya!** ("Mon oeil"). Ur **banne sklerijenn**. An **duaioù** (=kousiadennoù bihan du). **Moustrañ** war e c'hlac'har. Daou **gariad** (=daou amourouz).

3. Yezhadur. Ne oa ket evit **herzel ouzh** krommañ he genoù (ket "en em virout a"), paouezet e **oant** gant (...) (ket "o doa"), **rebech en he mouezh** (ket "war un don rebechus"),

4. Kevatalennoù nebeut anavezet pe re nebeut implijet. **Petra bennak ma** : daoust ma. **Mont da vrein** : breinaat. **Drouzivet** : dismantret. **Lañgachiñ** : krozal war (ub). **Sellet beuziñ kizhier** : sellet ouzh kizhier o veuziñ. **Da ziwall kargañ ar botoù-koad a oa** = ret eo diwall tremen hep kargañ ar botoù-koad. **Hirentez** : hirder. **Da zigentañ** = da gentañ. **Gaoliata** ur bank = en em lakaat a-c'haoliad war ur bank. Razhed **war o zro** = razhed en-dro dezho. Herzel **na** grogfe ar mergl warno. Savet **a-bik** o blev warno = hiriset o blev. **Pa** ne faote ket dezhañ mont da gousket diouzhtu = Peogwir ne faote ket dezhañ (...). **Mont war e gemend-all** : mont e fulor. **Ostaleri a oa ganti** = derc'hel a rae un ostaleri. **Pep kêr d'he zro**

(an nevez-vrezhonegerion ne reont nemet gant "pep hini d'e dro", met forzh petra a c'haller lakaat e-lec'h "hini"). **E-tailh**: prest. Biskoazh **kemend-all** bouzarus=biskoazh ken bouzarus. **Ober peoc'h** : reiñ peoc'h. Tremen **a-zouar** : tremen dre an douar

(evit ur vag). Biskoazh n'he doa Naig gwelet **ken bras bag**= biskoazh n'he doa Naig gwelet ur vag ken bras.

Ma c'hoar, chomet intañvez gant pevar c'hrouadur. **Nag a bet all a zo** evelti ! =Na ped re all a zo bet evelti.

5. Troiennoù arbennik : Biskoazh n'em eus bet gwelet **ul liv bennak** eus ar c'hwiled-se. N'em eus ket soñj **re** vat mui. A c'hortoze **ken** e teufe e vestr en-dro. An daou grennard **ha** danvez beleg anezho.

Diwar lusk he c'halon vat. **Lakaet sav** gant laez he c'horf, **war-bouez** hec'h ilin dehou. **Pouez traoñ** a oa gant an hent. **Aet on diwar re** gant ar brezel. E oa **aet bihan he c'halon**. **Dre Youenn e yae** an tad d'e baotr. Ma teufe **dezhi** gwellaat amzer. C'hoarzhin **e-leizh** o c'horzailhenn. E lakaas Mamm Naig sin ar groaz **war he c'herc'henn**. Lakaat **e gomz er gaoz**= dont e-barzh ar gaoz.

6. Kevatalennoù lennegel : amañ moarvat n'eo ket deskiñ an troiennoù eo a ranker ober, kentoc'h deskiñ dreveziñ anezho. **Evit mont penn-da-benn** gant ar wirionez : evit lavarout an holl wirionez. **Plantañ avel** gant o bouzelloù=brammañ. An douristed o **pourmen o c'halité**.

Ewan DELANOY

Ur C'helt : Matt Talbot

Ganet eo bet Matt Talbot, e Dulenn, Iwerzhon, d'an 2 a viz Mae 1856, c'hwec'hvet bugel un dousennad a vugale. Mousig e vez lakaet e skol ar "Vreudeur Peder Brech'h", met ne ra ket berzh en e studioù. D'e zaouzek vloaz e kavas fred en ul labouradeg boutailhañ bier. O labourat en un aergelc'h peurintret a alkool, ec'h heulio dizale skouerioù fall ar c'hopriddi all hag en em lakaas da beurskarzhañ ar boutailhoù.

Ouzh e welout, o tont d'ar gêr, tommet e fri, e klaskas e dad ul labour all dezhañ, dindan e evezherezh, e bodad simidi ar porzh. Gwashoc'h-gwashañ ez eas ar bed gant Matt ; stagañ a reas da sakreal gant doareoù lavar gouez an dougerion-sammoù. Gwashañ 'zo, e geneiled-labour a reas dezhañ lonkañ wiski. Mantret e dud, n'en devo mui e dad krog warnañ adalek neuze, p'emañ o splujañ a-grenn er vezventi.

Ha koulskoude, an den yaouank en deus ur galon vat. Emskiantek eus an divrud graet d'e dad, e kuita simidi ar porzh evit kregiñ gant ar vicher a vañsoner. Tremen a ra neuze e holl abardaevezhioù en ostaleri, o tistreiñ d'ar gêr, ingal, mezv. Foranañ a ra e c'hopr gant died. Gouelediñ a ra kement en e si ma veze gantañ a-wechoù bizied krog evit pourchas alkool.

Da fall ez a e gorf, goustad. Gwashoc'h avat ez eo ar pec'hed hag a ro taol ar marv d'an ene. Arver lontek ar boeson a zo mank ouzh ar C'hrouer. Gant an alkoolegezh evel gant an dram, e lam an den digantañ e-unan ar poellataerezh, ar pezh a zo barregezh uhelañ mab-den. An dizurzh-se, pa vez sevenet gant hollouiziegezh hag a-youl-gaer, a zo un droug a-bouez a-enep Doue hag ivez a-enep an

nesañ : en em reiñ d'ar vezventi, a ra d'ar re all gwallfeukiñ. Evel evit kement pec'hed grevus, ar reiñver-se a zegas gantañ koll ar radstad²⁸, gwashañ droug a c'hell c'hoarvezout gant an den. E gwirionez, n'en deus ket an den priziusoc'h mad eget ar vignoniez gant Doue ; hogen ar geneiled-se a ya da get gant ar pec'hed marvel.

Daoust d'e ziskar, e chom gant Matt ur begad onestiz. Ne orged ket. Bep mintin, ne vern evadegoù an derc'hent, emañ en e sav da 6 eur hanter evit mont d'e labour ; erfin e chom feal da oferenn ar Sul, daoust ma ne resev ket ar sakramantoù evit keloù-se.

Ur Sadorn a 1884, e sko dorn an Neñv war e zor. Goude bezañ bet dilabour, ur sizhunvezh-pad, n'eus gweneg toull ebet ken en e chakod ha setu-eñ dic'houest da brenañ boeson ha koulskoude ez eus prez bras ennañ kaout dioutañ. War-dro kreisteiz, gant e vreur yaouank Fulub, e troont en ur c'hornstraed, e-lec'h ma tremen ar vicherourion goude bezañ paket o gopr ; moarvat, hini pe hini a bedo anezho evit ur banne. Tremen ha saludiñ a reont, met n'eo kouviet gant nikun anezho. Ur sac'had droug a ya ennañ ; bezañ dioueret eus an alkool a zo tenn dezhañ, gloazet eo avat gant krizder e geneiled a baes dezho alies troiadoù en tavarnioù. A-herr setu eñ d'ar gêr. Souezhet-mik eo e vamm ouzh e welout o tegouezhout ken abred ha diwar an dour. E vamm ! Setu ma peg ennañ ar soñj ez eo bet ken dianaoudek en he c'heñver. Dister eo bet ar skodenn roet dezhi, rak e holl voneiz a ya en evadegoù. Bremañ avat, ez eo rannet e galon da vezañ he lezet ganti en hec'h unan, pa oa eñ o

²⁸ Radstad : *état de grâce*.

lonkañ, emgar an tamm anezhañ. D'ar c'houlz-se, en Iwerzhon, e oa dibaot ober ul le evit un den hag a venne en em zizober eus an alkool. Goude ar pred, chomet e-unan gant e vamm, e tiskleir dezhi a-daol trumm : “Mont a rin da ober ul le a zirwest, a emziouer”. “En anv Doue, kerzh d'hen ober, met arabat dit en em ouestlañ, mar ne zalc'hez ket d'az ker”. “Va mamm, emezañ, dirak Doue e touin”. Goude bezañ en em fichet, ez a da Gelenni ar Groaz Santel da c'houlenn ur beleg ha da gofes. War ali evezhiek an den-a-iliz, e ra gouestl evit tri miz hepken. Antronoz, ez a d'an oferenn pemp eur e iliz S. Frañsez C'havier, e kedun hag e tistro renevezet. Hogen, evit chom leal d'al le-se, e vo kriz ar stourm ; setu perak e tiviz Matt keduniñ bemdez evit perc'hennañ an nerzh speredel ret evit derc'hel d'e zisentez. Ar gwashañ mare eo ar sec'hed, d'an noz, goude al labour. Evit diwall ouzh ar mesatiz, an hoaladur, en em laka an nevez-kantroad d'ober baleadennoù e kêr...

E-doug e droioù, e stok ouzh un enkadenn all ; e yec'hed a zo aet da fall gant an alkool ha buan ez a skuizh. Neuze, o vont d'un iliz, daoulinet dirak an nevetlog, en em ro da bediñ, oc'h aspediñ Doue d'e nerzhekaat. E-giz-se, en em voaz da bleustriñ ti an Aotrou. Neoazh, hir e kav an tri miz ; heuliadoù an diouer : emdouelladurioù, diwaskadennoù, doñjerioù a ra eus ar prantad-amzer-se ur gwir galvar. Evit ur mare, e tihun an temptadur, dezhañ da stourm dispi ha da badout gant e aspadennoù. Un deiz, e tistro d'ar gêr, en em lez da gouezhañ war ur gador hag e tistag, dilaouen, d'e vamm : “Se a zo holl didalvoud, mamm, ur wech peurechuet an tri miz, ec'h evin adarre. Houmañ avat a frealz hag a vroud anezhañ da bediñ. Feal a-grenn d'an ali-se, e kav blaz gant ar bedenn, o kavout enni silvidigezh. An tri miz aet e-biou, souezhet diwar bezañ padet, ez adc'hra e le evit c'hwec'h miz ; ur wech kaset da benn an taol-arnod-se, ez en em ouestlo da chom da viken, hep banne ebet.

Ur vuhez nevez a zo krog gant Matt ; ur vuhez a nesaoni gant an Aotrou. An oferenn bemdeziek a zo ar sichenn anezhi. E 1892 avat, an oferenn da bemp eur, ma kedune enni, a zo lamet ; an oferenn gentañ a zo lidet hiviziken da c'hwec'h eur ha kard, re ziwezhat evit e labour. Daoust d'e uhelvarregezh war e labour, hep marc'hata, e kemm labour hag e krog evel darbarer gant ur marc'hadour-koad. Diouzh an noz, e dibenn e drevell, en em walc'h aketus hag e wisk e zilhad kempenn – rak ne fell ket dezhañ mont-tre e Ti Doue gant e zilhad labour - hag ez a d'an iliz evit ur weladenn d'ar C'herrin Glan. Un deiz ec'h anzav ouzh e gofessour :

“C'hoantaet em eus kalz road ar bedenn ha selaouet on bet penn-da-benn”. Hiviziken, e vuhez a sko war Doue ha dreist-holl war beziadelezh gwirvoudel an Aotrou en nevetlog.

Magañ a ra ivez un dener a zeolieg e-keñver Mamm Jezuz. Bemdez e ped ar chapeled ha Gwaznez ar Werc'hez. War-dro 1912 e lenn levr S. Loeiz-Vari Grignon a Vonforzh a-zivout “ar gwir zeolieg d'ar Werc'hez Santel”. Deskiñ a ra gantañ pleustriñ ar “Sklavelezh Santel” dre gantouestl e hiniden a-bezh hag e holl vadoù en darempred da Vari. Evit fetisaat seurt tommded a vab ouzh an Itron Varia, en doa aliet S. Loeiz-Vari Grignon dougen ur chadenn vihan. Setu perak e vo kavet chadennoù war e gorf-marv. Buan da bignat en e avalenn, e teu tenn dezhañ gouzañv mallozhioù ha lavar divalav e geneiled. O welout se, e washae e genvevelion o bommoù divalav. En derou, Matt o zreke, o gourdrouze start. Da c'houde avat, e kave gwelloc'h lavarout dezho dre gaer : “Jezuz Krist ho klev !” Un deiz, e ra tamalloù d'e vestr-micherour da vezañ bet pizh evit un oberenn a garantez. Follet e voe gant e vestr evit bezañ bet dizouj. Antronoz e teu d'e vestr : “Hor Salver, emezañ, en deus lavaret din goulenn digarez diganeoc'h ha dont a ran d'henn ober”. Erfin, e sav bri evit e vuhez skouerius. Eñ, a-hend-all a zo anezhañ ur c'heneil hegarat, bepred prim da c'hoarzhin gant ur farsadenn vat, gant ma ne yelo ket dreist ar roudenn.

War skouer hen venec'h Iwerzhon, hervez hengoun S. Koulm, e tiouer boued evit dic'haouiñ evit e bec'hedoù, en em lazeriañ ha skoazellañ e vuhez speredel. Koulskoude, pa vez pedet gant mignoned, e tebr evel an holl. Aet e Trede-Urzh S.Frañsez, ez aketo da heñveleriñ paourentez ar C'hrist, o krennañ war ar pep retañ, o reiñ d'ar beorion. E deroù e gantroidigezh, e chome gantañ ar boaz da vutuniñ. Un deiz, unan eus e vignoned a c'houlenn digantañ butun. Daoust m'emañ o paouez prenañ ur c'horn hag ur pakad, e ro harozek an eil hag egile ; hiviziken ez eo echu gantañ ar pleg-se. Met n'eo ket tra a lorc'h, un dra cheuc'h evitañ kaout levrioù, plijout a ra dezhañ kemer amzer da lenn, hag ar Bibl ha skridoù ar sent eo an oberennoù prizet gantañ. En ur follennata ar Bibl a zo bet kavet en e di, e verzer e plij dezhañ ar muiañ salmoù ar binijenn, ma kaver enno ar pec'her o tiskleriañ da Zoue e geuz d'e bec'hedoù, hag ivez e c'hougled²⁹ divrall e kendruez Doue. Ar vuhez-se a bedenn hag a binijenn a zo skoazellet gant radoù divoutin. Un deiz, e kred lavarout ouzh e c'hoar : « Poanius ez eo merzout an nebeud a garantez a zo gant an dud evit Doue ! O Suzanna, ma ouifes an don a levez e a zo bet din,

²⁹ Gougled : *fiziañs*

henozh, o komz gant Jezuz ha gant e Vamm santel !
» Neuze, dre ma ne fell ket dezhañ ober anv anezhañ e-unan, e tro kaoz.

D'e 67 vloaz, ez a e gorf da fall ; ar verranal hag an darlammoù-kalon a zigresk, dre ret, e oberiantiz. Goude daou brantad er c'hlañvdi e 1923 hag e 1925, e ya'ha un distera hag e stag en-dro gant e vicher. D'ar Sul 7 a viz Even 1925, e kemer penn hent iliz Sant Salver. Faezhet, e kouezh war ur riblenn-straed. Ur vaouez a ginnig dezhañ. ur werennad dour. Digeriñ a ra e zaoulagad, mousc'hoarzhin ha lezel e benn da blegañ. Ha setu ar gejadenn veur gant an Aotrou Krist deuet da c'hervel ar bec'herion (Mazh 9/13). E 1975, eo bet lesanvet gant an Iliz Keheladus. Hiziv

an deiz, meur a obererezh evit skorañ ar re skoet gant an alkoool hag an dramm en em laka dindan e baeronezh.

Ur skouer veur eo Mazhev Talbot evit an holl. Evit sklaved an alkoolegezh pe an dramm, ec'h anata, dre e desteni, e c'heller, dre rad Doue, en em zieubiñ. D'ar re a zo sklaved da bec'hedoù all : idolerezh, helazherezh, heñvelrevouriezh, pitoucherezh, sioc'hanerezh, hilastalerezh, laeronsi, divruderezh, falstesteni, e tegas soñj ne tleer morse dispiañ eus kendruer Doue, hervez kuzul S. Benead.

Ur Beneadad
(troet gant **Ar Bigouter**)

Keleier ha Kemennadennoù

Emañ ul lenner o klask ur skouerenn eus:

- 1- *Dafar evit ur c'heriaoueg a'n Ardamezouriezh*, Yellen & Abenez, Gwenedour N° 18-19, 1965.
- 2- *Geriadur pleustrek a Zoueoniezh, Feizoniezh, Biblouriezh, Lidouriezh, hag Ilizouriezh*, diwar zorn Turiav ar Menteg
- 3- a – *Dictionnaire des Gloses en vieux-breton 1964*, gant Leon Fleuriot.
- 3- b – *Le vieux-breton, éléments d'une grammaire, 1964*, gant Leon Fleuriot.

Mard eus lennerion o gouzout pelec'h ez tu da gavout anezho pe o defe anezho da werzhañ a eildorn, zoken eilluc'het, roit titouroù d'ar gelaouenn. Trugarez en a-raok

“**Liderezh an Eurioù**” levr ar Brevial ofisiel troet e brezhoneg diwar al latineg gant Paol Kalvez, ul levr a 1200 pajennad war baper “bibl”, keinet brav, a zo e gwerzh e ti Mari-Terez Kalvez, 12 Petit Raffuneau 44700 ORVAULT, chekenn war anv B.S.I. (*Breuriezh Sant Ildud*) 50 euro + 10 euro evit ar mizoù-kas.

Ur prof evit Nedeleg

An Emgav Chanter

ha danevelloù all

*Un dastumad a bemzek danevell gant Yann MIKAEL
Embannet gant IMBOURC'H
Rakskrid gant Pierrette Kermaal
280 p. Moulet e ti Ouestelio Brest
18 € franko Breizh ha Bro-C'hall ; er-maez ar
C'hwec'hkogn 20 € – kasit ho chekenn da :
Yann MIKAEL 12 straed René Giraud
44 130 BLAEN*

An niverenn-mañ eus *Kannadig Imbourc'h* a vo an hini diwezhañ evit ar bloaz 2008; soñjit, mar plij, da gas ho skodenn 12 € da adkoumanantiñ evit ar bloaz nevez Trugarez en a-raok ! Nedeleg laouen ha gwellañ hetoù deoc'h holl evit 2009 a zo o tont a-benn nemeur.

Mererezh

12 € eo ar skodenn emezellañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h*. Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://kannadig.chez-alice.fr/>.

Skridaozerezh

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr, pe dre ar Post da rener *Kannadig Imbourc'h* : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moulet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù**. Kergreven - 29800 Trelevenez - ISSN : 1144 357X